


REVOLUTION NATIONALE



édition :

centres de propagande

B. VOISSE

AR RENAD VICHY

1.KENARROUD ISTOREL AR SKRITELL

2. DONEDIGEZH AR MARICHAL PETAIN E PENN AR VRO

UN

ISKIS A VREZEL

ETRE GWENGOLO HA MAE 1940

➤ Digalonekaet eo ar soudarded

➤ Gortoz a ra ar soudarded er [linenn Maginot](#)

➤ Enkadenn bolitikel: [Daladier](#) a zo erlec'hiet get [Paul Reynaud](#), Prezidant ar C'huzul




Tremenomp e Kornôg ar c'hevandir europat.


Etre miz gwengolo hag ebrel 1940, an arme c'hall a c'hortoz an enebour war **ar linenn Maginot**; « **an iskis a vrezel** » eo. 8 miz hep tra ebet;

Met an Alamaned a droas tro-dro ar linenn en ur aloubiñ Bro Velgia hag Izel Vroioù. Engelc'hiet eo an arme Frañs ha R-U hag e rank an darn anezhe (350 000) tec'hout kuit dre vor e porzh Dunkerque.

Aloubet eo **PARIZ d'ar 14/06/1940. Ar Marichal Petain** a c'houlenn un arsav-brezel d'ar 17/06/1940 sinet d'ar 22/06/1940: Kannet eo e 5 sizhuniad.



AL LINENN MAGINOT:
Strategiezh en em
zifenn: gortoz an
enebour




Tremenomp e Kornôg ar c'hevandir europat.

Etre miz gwengolo hag ebrel 1940, an arme c'hall a c'hortoz an enebour war **ar linenn Maginot**; « **an iskis a vrezel** » eo. 8 miz hep tra ebet;

Met an Alamaned a droas tro-dro ar linenn en ur aloubiñ Bro Velgia hag Izel Vroioù. Engelc'hiet eo an arme Frañs ha R-U hag e rank an darn anezhe (350 000) tec'hout kuit dre vor e porzh Dunkerque.

Aloubet eo **PARIZ d'ar 14/06/1940. Ar Marichal Petain** a c'houlenn un arsav-brezel d'ar 17/06/1940 sinet d'ar 22/06/1940: Kannet eo e 5 sizhuniad.



14/06/1940: Pariz dalc'het.



Tec'hadeg ar siviled da vare an aloubadeg alaman
Even 1940: 8 million a Frañsizion pennfollet a guitaas ar
zonennoù dalc'het.

100 000 den marv e-korf 6 sizhuniad



FAZHIDIGEZH



1 850 000

C'est le nombre de soldats français, parmi lesquels 36000 officiers et 176 généraux, faits prisonniers par les troupes allemandes du 10 mai au 22 juin 1940 . Les hommes de troupes et les sous-officiers seront transférés en Allemagne dès septembre 1940 dans des camps appelés stalags. Les officiers auront droits à des camps moins inconfortables appelés oflags.

AR RENAD VICHY

2. DONEDIGEZH AR MARICHAL PETAIN E PENN AR VRO

10/06/1940: ar gouarnamant a glask repu e Bourdel dirak lañs ar bagadoù alaman.

Paul Reynaud a faot dezhañ derc'hel ar brezel nag e vehe dalc'het Frañs, harpet get Bro Saoz hag he zrevadennoù

De Gaulle , is-sekretour-stad evit an emzifenn a zo a-du ivez get ar strategiezh-mañ.

Met pennoù bras an Arme a nac'h.

Paul Reynaud a ro e zilez d'an 16/06/1940.

Ar Marichal Petain a gemer e blas, galvet get Prezidant ar Republik Albert Lebrun.


De Gaulle a glask repu e Londrez.

17/06/1940: goulenn a ra Petain un arsav-brezel

« Les chefs qui, depuis de nombreuses années, sont à la tête des armées françaises, ont formé un gouvernement. Ce gouvernement, alléguant la défaite de nos armées, s'est mis en rapport avec l'ennemi pour cesser le combat. Certes, [...] nous sommes submergés par la force mécanique, terrestre, aérienne de l'ennemi. Infiniment plus que leur nombre, ce sont les chars, les avions, la tactique des Allemands qui nous font reculer. Ce sont les chars, les avions, la tactique des Allemands qui ont surpris nos chefs au point de les amener là où ils en sont aujourd'hui. [...] [Mais] la défaite est-elle définitive ? Non ! [...] La France n'est pas seule ! [...] Elle a un vaste empire derrière elle. Elle peut faire bloc avec l'Empire britannique qui tient la mer et continue la lutte. Elle peut, comme l'Angleterre, utiliser [...] l'immense industrie des États-Unis. [...] Cette guerre est une guerre mondiale. [...] Moi, général de Gaulle, actuellement à Londres, j'invite les officiers et les soldats français, [...] les ingénieurs et les ouvriers spécialistes des industries d'armement qui se trouvent en territoire britannique ou qui viendraient à s'y trouver, à se mettre en rapport avec moi. Quoi qu'il arrive, la flamme de la résistance française ne doit pas s'éteindre et ne s'éteindra pas. »

Discours radiodiffusé du général de Gaulle, 18 juin 1940





D'ar 17 A VIZ EVEN 1940



"Français !

A l'appel de Monsieur le Président de la République, j'assume à partir d'aujourd'hui la direction du gouvernement de la France. Sûr de l'affection de notre admirable armée qui lutte, avec un héroïsme digne de ses longues traditions militaires, contre un ennemi supérieur en nombre et en armes. Sûr que par sa magnifique résistance, elle a rempli nos devoirs vis-à-vis de nos alliés. Sûr de l'appui des Anciens Combattants que j'ai eu la fierté de commander, sûr de la confiance du peuple tout entier, je fais à la France le don de ma personne pour atténuer son malheur.

En ces heures douloureuses, je pense aux malheureux réfugiés qui, dans un dénuement extrême, sillonnent nos routes. Je leur exprime ma compassion et ma sollicitude. C'est le cœur serré que je vous dis aujourd'hui qu'il faut cesser le combat. Je me suis adressé cette nuit à l'adversaire pour lui demander s'il est prêt à rechercher avec nous, entre soldats, après la lutte et dans l'Honneur, les moyens de mettre un terme aux hostilités. Que tous les Français se groupent autour du Gouvernement que je préside pendant ces dures épreuves et fassent taire leur angoisse pour n'écouter que leur foi dans le destin de la Patrie."

Discours radiodiffusé le 17 juin 1940

Rannet eo Frañs e div zonenn:

Frañs dalc'h: e Norzh

Frañs dieub: e Su

Ur linenn dispart ha bevenniñ: ret eo kaout un AUSWEIS, paperioù evit tremen

1/07/1940: staliet eo ar gouarnamant e Vichy .

10/07/1940: hollc'halloudoù d'ar marichal Petain

FIN AN III vet REPUBLIK



Pet lodenn ez eus ?





Ar steredenn David: arouez ar yuzeviezh

ha 3 foent ar Franc-Maçonnerie

Mont a ra an Ilvet Republik da neuz, setu ar pezh a zispleg faezhidigezh ar brezel hervez Petain. Kouezhet eo an Ilvet Republik peogwir emañ krignet en diabarzh get ar yuzevien hag ar Franc-Maçonnerie.

Emañ an enepsemitigezh é vrasaat e Frañs en XIXvet kantved, edan an Ilvet Republik er metoù enep d'ar renad parlamantel.

Maget eo ar c'hazetennoù enepyuzev get an afer politiko-arc'hantourel
STAVISKY(1934)

ha donedigezh Leon Blum e-penn Talbenn ar bobl.

Ur c'hwiblaer a orin yuzev rusian(Ukrainia) eo **Alexandre Stavisky**, naturalizet e Frañs e fin an XIXvet kantved. En em ensiliñ a ra e-barzh metoù politikel hag emañ e-darempred get ur bochad a deputeed ha ministred radikaled.

E-penn kalz a c'hwiberezhioù emañ met n'eo ket barnet biskoazh. Beviñ a ra en doare pompadus, e-darempred get ar bed politikel hag an uhelvestradurezh ar Polis.

E miz An Azvent 1933, ur c'hwiberezh diwezhañ a zo dizoloet: hani Kef gouestlañ Baiona. Embannet he deus an aozadur 200 000 000 a lurioù falstitloù ar c'hef evit ma c'hellehe Stavisky enkefiiñ ar sammadoù. Tec'hiñ a ra Stavisky kuit.

D'ar 9 a viz genver 1934 eo kelc'hiet ti –menez lec'h en deus Stavisky kavet repu. Disklêriiñ a ra ar polis bout Stavisky é teniñ doc'h ar marv. Ar memes deiz, Dalimier, ministr er gouarnamant Chautemps, a rank roiñ e zilez peogwir en deus graet brud àr an titloù Baiona pa oa ministr ar labour. Evit an tu dehoù n'eo ket Stavisky en em zistrujet met emañ bet drouklazhet a-benn chom mut da viken.

Reprezantiñ a ra ar finañs yuzev kengred get ar parlamanterien hag ar franc-maçonnerie.







4 Manifestadeg Talbenn ar bobl d'ar 14 a viz Gouere 1936

Trec'h eo ar c'henemglev eus an tu kleiz en dilennadegoù lezenniñ e miz Mae 1936, krouet evit difenn ar Republik. Anvet eo Léon Blum e penn ar gouarnamant. ① Léon Blum (sokialour) ② Maurice Thorez (komunour) ③ Roger Salengro (sokialour) ④ Maurice Violette (sokialour) ⑤ Pierre Cot (radikal)

Petra a reprezentant an ti a-gleiz?

5 elfenn pennañ da zielfenniñ





Ar banniel ruz: arouez an dispac'h, ar gomunouriezh, an Illvet Etrebroadelenn gomunour


E 1936 e stummas Leon Blum ur gouarnamant Talbenn ar bobl
get ar soasialisted, ar radikaled hag ar gomunisted.

Evit Vichy e oa krignet an Illvet Republik get ar volchevikiezh



Petra a reprezentant an ti a-gleiz?

5 elfenn pennañ da ziefenniñ





France et Compagnie


Un dro-lavar peyorativel eo, tennet a anvioù an embregerezhioù mafiaek er blezadoù 1930.

Taget eo c'hoazh an Ilvet Republik ha da gentañ Talbenn ar bobl. Lakaet eo àr-raok an aferioù politiko-arc'hantourel gwallskouerius er blezadoù 1930.

France et Compagnie, France et magouille eo tro-lavarioù implijet meur a wech get an tu dehoù pellañ hag emsavioù enep demokratel.

Petra a reprezentant an ti a-gleiz?

5 elfenn pennañ da ziefenniñ





UN TI GET UR SICHENN DISTABIL

capitalisme

Lakaat a ra en arvar Petain ar gapitalouriezh da lâret eo ar gevredigezh industrial a zo barnet getañ.

Evitañ an dispac’h industrial en deus kaset donedigezh an argant lous tapet er boursen pe dre obererezh arc’hant da lâret eo hep labourat.

Rankout a ra an arc’hant donet ag an douar rak « *la terre, elle, ne ment pas* »

pastis

Ar stourmoù enep d’an alkoolegezh e oa kroget e-penn kentañ an Xxvet kantved. Unan a abegoù ar faezhidigezh eo an alkoolegezh. Ar Stad c’hall a rae ur skeudenn fall ag an alkool hag a lakae ar mab-den da vout sklav. An holl alkool ne oant ket brud fall àrne: da skouer ar gwin, produ an douar; Met ar pastis, e-giz a-raok ar brezel, a oa koñsideret èl un digor-kalon produet er labourvaoù kentoc’h. Difennet e ta da vout ar merkoù pastis da vare Vichy.



UN TI GET UR SICHENN DISTABIL

antimilitarisme


Unan a abegoù ar faezhidigezh eo an enepsoudard.
 Evit ar Stad c’hall orin an enepsoudard a rank bout kavet e-barzh an afer Dreyfus e-lec’h e oa bet un ofiser a orin yuzev kondaonet treitour.
 Ur fazi barnet eo bet hervez Vichy.
 Un emsav habask ez eus etre an daou vrezel.

démocratie

Unan a abegoù ar faezhidigezh eo an demokratelezh.
 Evit Vichy e rank kaout ur chef evit diviz.
 Saotret eo an demokratelezh get aferioù gwallskouerius èl Stavisky, get enkadennoù grevus er blezadoù 1930 get kresk ar ligoù broadelour.
 Rebechet eo d’ar sistem parlamantel bout distabil.

Petra a reprezentant an ti a-gleiz?

5 elfenn pennañ da ziefenniñ



Parodienn ger-stur ar Republik c'hall



breudeuriez

An Etrebroadelenn eo bout hep broad. Evit Petain asantiñ ar breudeuriez eo asantiñ an etrebroadelenn da lâret eo ar gomunouriez.


ingalded

Ar lorberezh(demagogiezh) eo lâret gevier d'ar bobl(demos). Evit Petain, lâret d'ar Frañsizien e vezant ingal dirak al lezenn eo lorbus. Tud zo a c'hell urzhiñ , tud zo a asant.

frankiz

Ar lizidanted a dalv ober netra.
Referañs an div sizhuniad vakañsoù gopret hag ar sizhun 40 euriad.
Evit Petain, ar frankiz a gas ar lizidanted

REVOLUTION NATIONALE



édition :


centres de propagande

B. VOISSE

Petra a reprezentant an ti a-zehoù?

5 elfenn pennañ da ziefenniñ





AR BANNIEL TRILIV


**Ganet eo ar banniel triliv da vare an Dispac'h gall.
Treuziñ a ra an holl renadoù an XIXvet kantved.**

**Evit Petain, arouez Frañs trec'h er brezel 1914-1918 eo ar
banniel triliv.**

Petra a reprezentant an ti a-zehoù?

5 elfenn pennañ da ziefenniñ






Steredennoù ar marichal Petain

7 steredenn:
marichal

Reprezantiñ a ra e rez en arme.

Salver ar Frañs eo, [kanmeulet get ar propaganda](#)

Diell « Maréchal, nous voilà »,
 kanaouenn kanet get ar vugale c'hall er skolioù e-pad ar renad
 Vichy
 « Une flamme sacrée monte du sol natal
 Et la France enivrée Te salue Maréchal !
 Tous tes enfants qui t'aiment et vénèrent tes ans,
 à ton appel suprême, ont répondu « Présent ! »
 Maréchal, nous voilà !
 Devant toi, le sauveur de la France,
 nous jurons, nous tes gars de servir et de suivre tes pas.
 Maréchal, nous voilà !
 Tu nous as redonné l'espérance. La Patrie renaîtra.
 Maréchal, Maréchal, nous voilà ! »



Skritell get Servij propaganda Vichy , miz Here
 1940

Petra a reprezentant an ti a-zehoù?

5 elfenn pennañ da ziefenniñ



4 filer ar Stad c'hall



AR SKOL

AN ARTIZANEREZH

AR BEIZANTED

AR LEGION

AR SKOL

Diazez an Dispac'h broadel eo ar skol. Desket eo ar vugale en urzh vat(moral).

Ambrouget eo ar re yaouank e-barzh emsavioù èl Chanterioù ar yaouankiz (30 a viz Gouere 1940) pe Kompagnoned ar Frañs



AFFICHE ET INSIGNE
DES
CHANTIERS
DE JEUNESSE



AN ARTIZANEREZH

Kas a ra ar Stad c'hall ar c'horfuniaderezh er labour-douar hag en industriezh.

N'eo ket ken ur c'heodedad an den met ur produer.

Emañ kentoc'h evit an artizanerezh ar renad Vichy peogwir he deus an industriezh bras kaset dizingalderioù ha stourmoù ar renkadoù sokial.

Liammet eo an industriezh get ar finañs ha n'eo ket yac'h evit Petain.



AR PEIZANTED

Kas a ra ar Stad c'hall ar c'horfuniaderezh er labour-douar hag en industriezh.

(Karta al Labour 4/06/1941)

N'eo ket ken ur c'heodedad an den met ur produer.

Kaniñ a ra an Dispac'h broadel gloar da ved ar beizianted rak

« la terre ,elle, ne ment pas... elle est la Patrie elle-même ».

Bed ar maeziou eo ar gevredigezh a-raok an Dispac'h industriel, ur gevredigezh get an liz e-kreiz ar gêriadenn.




AR LEGION

Krouidigezh ar « **service d'ordre légionnaire** » **SOL**, e C'hwevrer 1942 get Joseph Darnan, aozadur soudardel a – bann harpiñ an Dispac'h broadel.

An arme, penn-da-benn é kenlabourat get ar renad nazi, a lakae e izili da douiñ groñs « enep d'an demokratelezh hag ar vosenn yuzev ».

Ar-lerc'h e voe e miz genver 1943 ar « Milis broadel » ha goude ar « milis gall ».



Petra a reprezentant an ti a-zehoù?

5 elfenn pennañ da ziefenniñ



TRAVAIL

FAMILLE

PATRIE

Labour:

Hervez ar propaganda, « le travail des Français est la ressource suprême de la patrie ». Ret eo labourat evit adsevel ekonomiezh ar vro.

Pétain a faot dezhañ torriñ get ar gapitalouriezh é sevel ar ar c'horfuniaderezh (strolliñ a ra ar batroned hag ar vicherourien) é zifenn an harz-labour, é lakaat ar prizioù hag ar goprou.

Da gentañ e vez lakaet da dalvezout labour ar beizanted hag ar labour-dorn.

Familh:

Hervez Vichy, « les familles françaises restent les dépositaires d'un long passé d'honneur ».

Diazez ar gevredigezh eo ar familh. Ret eo gober bugale evit kaout ur Frañs greñv.

Goulenn a ra groñs ar gouarnamant get ar merc'hed da chom er gêr (devezh ar mammoù) kas a ra àr – raok ar familhoù niverus (medailhenn), difennet eo an torr-dimeziñ, an diforc'h-bugale a zo mouget pe barnet rust.

Renet eo ar familh get an tad, ur patriarch ha Pétain en em geñveria get « tad an holl Frañsizien »

mammvro:

« ar marechalism »

Ar Frañs eo ar vammvro.

Ur renad aotrouniek eo an Dispac'h broadel.

Skarzhet eo ar Yuzevien, berzet eo an harz-labour, ar sindikadoù, ar strolladoù politikel, kontrollet eo ar mediaoù, kreñvet eo an evezhierz pols.

Toullbac'het eo tud politikel an Ilvet Republik èl Blum, Daladier, Reynaud.⁴³

REVOLUTION NATIONALE

Petra a reprezentant an ti a-zehoù?

5 elfenn pennañ da ziefenniñ





Anv ar politikerezh savet get ar Stad gall, ar renad Vichy renet get ar marichal Petain

Savet eo bet ar skritell etre 1940 ha 1942 get ur strollad a harpe ar renad Vichy da lâret eo *R. Vachet*, kreizenn propaganda an Dispac'h broadel e Avignon.

. N'eo ket ur skritell ofisiel met e anaouamp e oa bet disklêriet ar politikerezh-se get ar marichal Petain en ur brezegenn d'an 8 a viz Here 1940.

Ur skouer a-feson hag a reprezent ideologiezh ar renad Vichy.

Dezverkoù ar renad Vichy : n'int ket àr ar skritell

Kenlabourerezh get ar renad Vichy: Montoire

- [Kenlabourerezh politikel](#)
- [Kenlabourerezh ideologel: ar politikerezh enep-yuzevouriezh](#)
- [Kenlabourerezh ekonomikel](#)

Politikerezh ar c'henlabourezh

C'est librement que je me suis rendu à l'invitation du Führer. [...] Une collaboration a été envisagée entre nos deux pays. J'en ai accepté le principe. [...] J'entre aujourd'hui dans la voie de la collaboration. [...] Cette politique est la mienne.

D'après le *discours* radiodiffusé du maréchal Pétain, 30 octobre 1940.

Document 48 : La rencontre entre Pétain et Hitler à Montoire, le 24 octobre 1940.



Crédit photographique : © Roger-Viollet,
numéro d'inventaire : RV-342009

Kejiñ a reas Pétain get Hitler e **Montoire(Loir-et-Cher)** d'ar **24 a viz Here 1940**: kinnig a reas Pétain ur c'henlabour àr an dachenn bolitikel. Ofisiel e teuas da vout politikerezh ar c'henlabourezh etre ar renad Vichy hag ar renad nazi. Displegiñ a ra Pétain e soñj: kadarnaat a ra politikerezh ar c'henlabourezh a-benn difenn unaniezh ar vro hag hec'h interestoù. Gortoz a reas Pétain ur plas evit ar Frañs e-barzh an urzh nevez europat goude trec'h Alamagn. Gortoz a reas efedoù fetis, hervezañ, a zigreskehe efedoù ar faezhidigezh(digresk ar frejoù dalc'h, distro ar brizonidi, linenn disparti). Met ur c'hiwtadenn e voe bet peogwir e oa bet dalc'het ar Frañs penn-da-benn a-dal miz Du 1942.



Ar c'henlabour politikel:

Gallaoued, a-du get ar c'henlabourerezh, a vennas mont pelloc'h c'hoazh ha lakaat ar faskouriezh da ren àr an holl Europa. Ur lod anezhe a emouestlas diàr 1941 **en LVF (Strollad Emoustlidi Vro C'hall)** evit mont da stourm e Rusia a-skoaz get an Alamananed enep d'ar volchevikiezh. Enframmet e oa er Wechmacht hag ar soudarded a wiske ar gwiskamant alaman met gwriet ur skoedig triliv.

E Gouere 1944 an **SS Charlemagne** a gemeras plas an LVF: ar soudarded-mañ a gemeras perzh en emgann Berlin hag e oa bet ar stourmerien diwezhañ tro-dro d'ar bunker Hitler.

Ar c'henlabourezh ideologel:

Enep-yuzev eo an renad Vichy.

Mont a reas ar gouarnamant **PIERRE LAVAL** pell àr an hent kenlabourezh é sevel lezennoù a-enep ar yuzevien hag é kemer perzh [e forbannadur lod anezhe](#).

Diell :**Kentañ “statud ar Yuzevien”, embannet get Petain d’an 3 a viz Here 1940**

Muzulioù evit o skarzhiñ kuit

Mellad 1: Lakaet eo da Yuzev, e-keñver ar lezenn-mañ, kement den aouenn Yuzev tri eus e dud kozh, pe daou anezhe eus ar ouenn-se, m’oe yuzev e bried.

Mellad 2: berzhet eo doc’h ar Yuzevien sammiñ ha lakaat e pleustr ur garg publik pe ur gefridi bennak e-toues ar re a gaver amañ dindan:

pennStad, ezel eus ar gouarnamant, lez-varn torriñ, lez ar c’hontoù, kargidi ar polis, kelennerien, ofiserien an armeoù.

Mellad 5: ne c’hello ket at Yuzeviene mod ebet, kaout hani ebet eus ar micherioù da heul: ober ar micherioù-mañ: renerien, kenwerzhourien, kazetennerien, pennskridaozerien kazetennoù, kelaouennoù, ajañsoù pe mareadegoù(...) merourien eus kement embregerezhioù stag doc’h ar skingas

Diell: [2/06/1941 an eil Statud yuzev](#) a skarzhas anezhe ag ar gevredigezh: ar Yuzevien estren(goude gall) a voe bac’het er c’hampoù gwarnet get jañdarmed a-raok bout kaset er c’hampoù-marv.

Ret eo kaout ur steredenn velen àr o dilhad.



affiche du PPF, signalé Michel Jacquot, 1942, (réimprimé en 1943 et 1944, 156 x 102)




1942-1944	330 000	Niver a yuzevien e Frañs
	80 000	Yuzevien deportet
1945	2500	Yuzev en em dennet ag ar c'hampoù marv



Skrapadeg Velodrom goañv (16-18 a viz Gouere 1942) anvet ivez Vel'd'Hiv: 13 152 yuzev harzet, en o zouez 4000 bugel get polis ar Frañs. Deportet e vint àr-zu Alamagn.

Ar Milis, bet krouet e 1943 aozadur politikel hag arme a genlabour get an Alamaned evit argas enebourien renad Vichy (Yuzevien ,resistañted, tud enep d'an STO).



Kenlabourerezh ekonomikel

LA RELEVE: krouet e miz Even 1942 get Pierre Laval:

Dieubiñ ur prizonad brezel gall ha kas 3 micherour gall da labourat en Alamagn.

Ur c'hengred broadel e oa evit ar renad Vichy.

Daoust d'ur propaganda niverus e oa bet ur c'hwitadenn.

Kemer a reas an STO plas d'ar releve.



AN STO: Service du Travail Obligatoire (servij al Labour Ret.)

Lakaet e-pleustr e miz G'hwevrer 1943.

Rekizet eo rac'h ar re yaouank etre 21 ha 23 blez evit mont da labourat en Alamagn: 700 000 a voe kaset.

An diviz-mañ en deus maget ar Resistañs rak tud a ya d'ar strouezheg a-benn achap d'an STO.

Ur galet a vuhez pemdeziek

Kentañ preder ar C'hallaoued e veze **ar bitailh**.

Get **ar marc'had kuzh** (gwerzhiñ edan guzh produioù dibaot é lakaat prizioù uhel-tre)e c'hell an dud pinvidik preniñ n'eus forzh petra get ma vhehe lakaet an hirañ priz:

tra ma c'houneze un dorn-labourer 1200 lur ar miz hag ur skriverzerez 2200 lur e vez gwerzhet 120 lur un dousenn vioù ha 250 lur div luriad kig er marc'had kuzh.,

Prantad ar marc'had kuzh, ar sistem D, **an ersatz**(evel topinambours, saccharine, succédané kafe... , produioù a gemere plas unan arall).

Krogiñ a reas yec'hed an dud da zizeriñ.



Klozadur:

Implij a ra ur **metaforenn**: teknik propaganda klasel: skeudenna a ra ar Frañs an ti.

Ur skritell propaganda politikel eo ,ec'h implij div bennaenn, div ideologiezh penn-da-benn **manikeel(ar mad hag an droug).**

Implijet e vez an gemmeskadurezh (amalgam) evit droukprezegiñ an Ilvet Republik:

Kinniget e vez an doare anarkiezh ar pezh a varn ar renad Vichy:

-Ar vicherourien a zo keñveriet get ar pastis hag an alkoolegezh

-Ar Yuzevien a zo keñveriet get ar gapitalouriezh, ar brokiñ arc'hant hag an bizhoni(tost doc'h e archant).

-Ar franc-maçonnerie a zo keñveriet get ar bizhoni, an emgarantez.

Klichedoù a bep seurt ez eus, gouennelourel, enep-yuzev en tu kleiz.

An talvoudegezhioù lakaet da dalvezout a vez kinniget : an arme hag an Iliz a rank stummiñ diazez an ti , an Dispac'h broadel, diazezoù pilerioù ar renad Vichy da lâret eo ar beizanted, an artizaned, hag ar familhoù niverus.